

Komzù
PER HELIAS

ENEZ EUSSA

81
Sonerez
POLIG MONJARRET

$\text{♩} = 180$

Ker - reg Ra - den - nek ha lan - neg Brug - Deñ -
ved tro - el - let ar gwas - ked mut . Eul lus - kel -
le - rez hud ha yud War hun an dud , Su - tel an
a - vel ar chri - sa , o ka - na Brud E - nez Eus - sa .

I

Kerreg radennek ha lanneg,
Brug,
Deñved troellet er gwasked,
Mut,
Eul luskellerez hud ha yud
War hun an dud,
Sutel an avel ar c'hrisa
O kana brud
Enez Eussa.

II

Gwalarn, Kornog, Reter ha Bis,
Holl
A lak o chas da gas war diz
Foll.
En noz e stok eun taol morzol
Ouz ar c'horoll.
An aod a groz en e gwasa
O ouela koll
Enez Eussa.

III

Gortoz, va Enez, ken warc'hoaz.
Ken !
Avel ha koumm a davo c'hoaz,
Men !
Kened eur ganevedenn c'hrenn
A-dreñv a gren
Hag a ruzio, dudiusa,
'Kreiz ar mor sten
Douar Eussa.